

# Son ar " Réveil "

Gazetenn ar flêr.

Var don : *Ann hini goz.*

Eur gazetenn zo e Kemper  
Leshanvet *gazetenn ar flêr.*

DISKAN :

Euz *gazetenn ar flêr*  
Ma c'halon 'neuz donjer.

Arabad e iaffe 'n ho ti  
Gazetenn louz ar gaouier Jouy.

Mar kouez 'n ho taouarn ar *Réveil*  
Stlapit-hen buhan var ann teil.

Pe marteze eo c'hoaz guelloc'h  
E ve kasset da graou ar moc'h.

Sur, gant ar moc'h, ma oueffent lenn,  
'Ve karet ar seurt kazetenn.

Da viana, lennet e ve  
Gant mistri-skol ar giz neve !

Ha lod âne (gout mad a reer)  
A skriv var *gazetenn ar flêr.*

O mez ha mez d'ann holl vistri  
En em laka da heul ar Jouy !

Mestrezed-skol ive 'gaver  
A du gant *gazetenn ar flêr.*

Eur spont eo guelet ar seurt-se  
Karget da zével bugale !...

Ar *Réveil* 'baoue m'eo ganet,  
Ne ra 'met labour milliget.

Da Zoue, d'an Iliz santel,  
D'ar veleien e ra brezel.

Leun eo ive a loustoni  
Berniet ha mesket gant ar Jouy.

Mignon eo da bôtred ann draill,  
Ha dreist peb tra da Jorj ar Bail.

Mignon eo da Vriand beg flour,  
Ha da Glemenceau ann treitour.

Ar *Réveil* 'neuz evit micher  
Dastum bep sun eur bern geier.

Hag he c'heier, eur vech berniet,  
Ato er bern a ve lezet.

Kanfarded *gazeten ar flêr*  
Eunn devez c'houi gousto d'ho ler !

Rag ann dud sod tromplet ganoc'h  
Heb dale a velo sklerroc'h.

Neuze, var ho gazetenn ru  
Gant ann oll e vo kriet hu.

Ha prestik, laouen ni glevo :  
*Gazetenn ar flêr zo maro !*

**Ann douchenn.**

*(Tous droits réservés.)*